



Kaniri Breiz-Izel



Ar Meliner



Editions TONTON PHILE

Imprimerie Louis Boclé, 40, Place Thiers, Morlaix

Ar Meliner

Kanet gant Grouik Tan: y amener en Keraez

Ar me-li-ner var ar cho-
ser ma dou-sik ar me-li-ner var ar ch
ser kana ha c'hoi - tel - lat a
ra di gou tra-di - ra la-di-ra dou
- de - no kana ha c'hoi - tel - lat a
ra me zo voret : da ve - ta

— Ar Meliner war ar choser,
Ma dousik !

Ar Meliner war ar choser,
Kana a c'houitellat a ra :
Digou tradira ladira dondeno,
Kana ha c'houitellat a ra,
Me zo vonet daveta.

— Daveta, oh ! na n'it ket,
Ma merc'hik !
Daveta, oh ! na nit ket (*bis*)
Digou tradira ladira dondeno,
Daveta, oh ! na nit ket,
Gant aoun na vec'h gwall ozet.

— Fichet ma maladen d'in,
Ma mamik !
Fichet ma maladen d'in (*bis*)
Digou tradira ladira dondeno,
Fichet ma maladen d'in,
Me ia ganthi d'ar vilin.

Er vilin pa oan erruet,
Ma dousik !
Er vilin pa oan erruet,
Er vilin pa oan erruet,
Digou tradira ladira dondeno
Er vilin pa oan erruet,
Oa et an dud da gousket.

— Dihunet holl dud an ti,
Ha deut da zizamma d'in.

— Aben a zigasin d'ac'h,
Pesort ed a zo ganac'h ?

— Kerc'h ha segal hag ed-du,
Namal ar vilin war he zu.

Pe e ra pe ne ra ket,
Ho maladen vo malet.

Ma ar vilin o vala flour,
Ni hon daou raïo l'amour.

Ha dre ma c'ha ar bleud er zac'h,
Ar Meliner a stard ar plac'h.

— Meliner paour ma lezet,
Banden ma broz a dorfet.

Banden ma broz satin wen,
A goust eur pistol ar walen.

Arc'hant awalc'h zo er vilin,
Da brena brojou satin.

Kemenerien a zo er vro,
Hag arc'hant a zo d'o faëo.

—C'houi c'hei d'ar foar, me na nin ket,
Eun tavanger d'in a brenfet.

Eun tavanjer vo great gant gloan,
Da baka ma hini bihan.

C'houi c'hei d'ar foar, me na nin ket,
Hag eur c'havel d'in abrenfet.

Eur c'havel great gant koat Rouan
Hag a luskello e unan.

A luskello dre ma hunvre,
C'hellin neuze leda koue.

Neuze c'ha Margodik d'ar ger,
Ha karget d'ei he faner.

Eun troc'had voulouz war he chouk,
Ha Margodik araog a zoug.